

KLOAREK KOAT AR RANNOU

HA -

PENN-HEREZ KERZANTON

War don : *Kurunen aour ha perlez an Ilron-Varia Remengol.*

Karantez ha glac'har !!!

I.

Tud iaouank a Vreiz-Izel, didoztait da glevet
Ar recit eus va dañlou ha va foanion kalet :
Me zo eur c'hloarek iaouank a eskopti Kemper
Am boa choaset eur vestrez en eskopti Treguer.

A c'harz ar mor oan ganet e bro sant Gwenole,
Ha biskoaz nemet glac'har n'em euz bet en bue :
Glac'har a guir garantez, setu va flaneden,
Planeden rust a kalet da heulia pen-da-ben.

Pa oan em bugaleach va mamm baour aliez
A lavare din : « Va mab var a ped ar Verc'hez,
« Ped anez-hi, va mabik, ped Gwerc'hez Remengol,
« Mar he fedez a galon, biken ne di da goll.

Patronez va mamm dener, Gwerc'hez vad Remengol,
Pe gweach oc'h euz hu miret na doun me eat da goll!...
Ho peded am euz bepred... breman, arog mervel,
E kanin ho meuleudi d'am breudeur Breiz-Izel.

II.

Pa guimiadiz dioc'h va zud, pa ziz pell euz ar ger,
Evit mont war a studi e skolach Landreguer,
N'em boa nemet pemsek vloa, me a vele dourek,
Rag evidon ne oa ken, allaz ! a eurstet !...



K9

BR. 848A d

O tostaat oc'h Landreguer e kaviz eur plac'hik,
Koaont vel eun elik Doue, he hanno voa Metik,
D'ar gouent e zea ive, eval d'oun d'ar studi,
He c'halonik oa mantret kement ha va hini.

« Salud deoc'h, plac'hik iaouank, a lavariz dez-hi,
« Evel d'eun oc'h ankeniet o kuitad tud ho ti ;
« Ho tornik flour em dornik laket gand karantez,
« Hag vezimp eureussoc'h o wela assamblez. »

Ar plac'hik a lavaras : « O kloarek Gwenole,
« Pedomp Doue alies an eil 'vit eguile,
« Er joa koulz hag en anken dalc'hit sonj a Velik
« Euz a vremen da viken e vo ho mestresik.

« — O Metik, va c'harante, rozen gaër Breiz-Izel !
« War ho mignon Gwenole tolit breman eur zell,
« Eur zell digant ho lagad a rañ va eureusted
« Keit ama lezo Doue ac'hanon war ar bed. »

Erru e kaër Landreguer, erru e penn hon hent,
Me oe kasset d'ar skolach, ha Metik d'ar gouent :
Ann disparti oe kalet, c'huero hac ankeniuz,
Ann eureustet er bed-man, siouaz ! n'eo ket paduz !...

'Tre ma chomiz er skolach, skenden dous Metik kez
Enn deiz, enn noz dirazon he deue a'iez,
Neuze he peden Doue ha Sent koz Breiz-Izel
'Vit ma vije he buez, laouen euraz, santel.

III.

Pa oe echu va studi ez iz da Remengo !
Da bedi c'hoaz evit-hi Gwerc'hez vad *Remed-oll* ;
Seiz tro a riz d'an aoter, devez ar pardoun braz,
Ha seiz tro d'an iliz zakr war ben va daoulin noaz.

Goude an offeren-bred, o pebeuz levenez !...
Er vered, gant he mamm ger, e velis Metik kez
Laouen oa evel an deiz ha coant evel al loar,
Biscoaz penn-herezh ker koant n'euz bet war an douar.

Lugerni a re he zall, he diou chod gwen a ru,
He ginou, vel eur rozen, he bleo, he lagad du,

Eur groaz aour en he c'herc'hen, he c'hoef dantelezet
Lavaret 'vije eun eal eus an ên diskennet.

« O ! pebenz joa evidomp va c'hloarek Gwenole,
« En em gaout en Remengol, deiz pardon Mamm Doue,
« Mamm an oll dud eun ankeniet, Gwenole, va mignon,
« Evidout, e peb amzer, he fediz a galon. »

« — Metik koant, setu aman, ar voalen aour,
« A roaz din, arog mervel, Annaik va mamm baour,
« Doug anez-hi war da viz, kemer-hi digan-en,
« Me dou, war goalen va mamm, d'az karet da viken. »

« — Ar groaz aour zo em c'herc'hen a vo did Gwenole,
« Eur guchen euz va bleo e roan did ive ;
« War ar groaz se e touan ha dirag a Werc'hez
« E vi karet gant Metik 'tre ma vo e buez. »

Ha daoulinet en iliz, hon euz gred hor peden,
A roet evit offrans, eur c'houris koar melen,
Beniguet ho medalen, poket d'ar relegou,
Da relegou Sent Breiz, karet gant hon tadou.

Goude don euz baleet hon daou da Vreiz-Izel,
Ha guelel kalz ilizou, kalz a dourio huel,
Abatti Landevennek ha mor Douarnenez,
Lec'h ma oa ker Is hag ar brincez Ahez.

Gwelet hon euz Mene-Hom, hag iliz veur Kemper,
Mene-Bre, iliz Bulat, hag hini Landreguer,
Kastel Brest, Sant I'an-ar-Biz, iliz Salaun ar foll,
Ha kaera tour so er bed, tour huel Castel Pol.

Gwelet hon euz Ker-Ahez, Kemperle, Pont-n'Abat,
Fouenan bro ha merc'het koant, Gwengamp hag Huel-
Montroulez ha Lan-Huon, Krozon ha Lez-n-Even, [goad.
Kallak, bro ar gourinou, Kastel-Lin Rosporden.

Klevet on euz o krozal ar m' r e beg a Raz,
Bisqoaz den n'hen tremenaz eb santout aon pe c'hla ;
Bet omp en enez Sizun, en Huessa, Molenez,
En enez Vaz, er leodet, ive er Seiz-Enez.

Eur blavez omp bet eurus evel eal Doue.
E setu lec'h pa hor guelel, an oll a lavare :
« Setu kloarek ar Rannou, soun evel cun derven.
« Setu Metik, he vestrez, fresq evel eur rosen. »

IV.

Devez pardon sant Herbot, e klevis eur c'helou,
En euz beuzet va c'halon en eur mor a zaëlou :
Gant e zad ha gand e mamm, d'amm mestrezik Metik,
E oa choaset da bried eur pagan pinvidik.

Ar pagan ze oa diot, hep furnez, hep skiant,
Ne gare war an douar nemet ar gwin-ardant :
Metik paour, pa e gwele, a grene gant enkrez ;
Hogen, he zud oa dallet allaz ! gant ann danvez !...

Mont a riz prim de gwelet neuze da Gerzanton ;
Dre ma tostaen, em c'hreis e c'hrene va c'halon ;
War dachen ar bourg o sôn e oa ar biniou,
Tud ann eured, ha Metik beuzet en he daëlou.

Metik, a dreuz he daëlou, a reaz ouzin eur sel
En eur lavaret : *kouraj, mignon fidel !*
Monet a ra en iliz, lavaret 'ra d'ar belek :
Gwenole eo a garan hag hen vo va fried !

Koueza raze d'ann douar ractal ar benn-herrez,
Ha douget oe dioc'h-tu euz an iliz er mez ;
Dispak e c'hoef, he dillat, ha dispak he bleo ;
Seblantout a ra beza eun elik paour maro.

Mantret oll gant ar glac'har e honeziz d'ann daoulis,
Eun eur crial : « O Metik sell a druez ouzin !... »
Pokat a riz d'he dornik d'he diou chod de c'herc'hen ;
O Metik ! Metik ! pehini a garien !

Ann disesper en dro din, evel eur vantel blom,
A gassaz pell ac'hanon, pell war za Mene-flom...
Va skiant a zo collet va c'halon a zou ien.
O Metik ! Metik ! Metik ! pehini a garien !

Eiz de goude, asezet e kreiz keat ar Rannou,
War va diou chod e red diou feunteun a zaëlou...

Pa glevis e Rumengol o zop anter-noz,
E lavariz esklamet : « Va Doue deoc'h bennoz.

- « O Gwerc'hez vad Rumengol, sellit oc'h va g'laç'har,
- « Aman oun deud da vervel breman war ho tonar :
- « Varc'hoaz, pa zao ann heol arc'hantet en envo,
- « Dindan an derven goz me a vo cavet maro !!!...
- « O Metik, va douzik koant, p'hini a garien,
- « Kenavo lavaran did er bed ma da viken !
- « Gant ar maro unanet, ni c'hoaz en em garo,
- « Kenavo er baradoz, kenavo, kenavo !!!...

V

Ann de varlec'h da zao heol, eun durzunel hep par,
A hirvoude en derven he c'hlemou a glaç'har ;
Ar c'hloarek a oa maro, maro gant an ankren,
Enn eur lavaret : *Metik ! te p'hini garien !*

Ar c'hloarek paour a starde c'hoas war he vuzellou
Kroas aour ha bleo du Metik, glebiet gant he zaëlou,
War ann derven n'doa skrivet hano he garante,
Ha diou halon unanet treuzet gant eur c'hleze...

Kasset eo bet ar c'hloarek da vered Rumengol,
Ha sebeliet e dishoel iliz zakr *Remed-oll*,
Iliz patronez he vamm en deuz bet ken karet ! ...
Tud iaouank a Vreiz-Izel, pedit 'vit han bepret.

Setu eta Gwenole en he wele douar !!!...
Eur miz goude eo klevet huanadou glaç'har...
Eur plac'hik gwisket e du, e bered Remengol,
Deut di da bedi Doue ha Gwerc'hez Remed-oll.

O tremen dre ar vered, velas war eur men be,
Skrifet neve flamm hanon he mignon Gwenole,
Epad ann noz daoulinet, Metik, wele dourek,
Ha d'ar men be e poke, e poke kalonek.

- « O Gwenole, emez-i, setu te o repos
- « E douar zakr Remengol ez out deut d'am gortoz,
- « Mes ken ma tarzo ann de, o oa muia karet,
- « Er be man, dre zorn Doue, ni vezo unanet !!!...

Da zao-heol, eur belek koz, vont da bedi Doue,
He c'havas anter varo, gourveet war ar men be ;
Rei a raz d'ar plac'hik paour absolver ha pardon :
Metik a varuas laouen, raktal, hant rann-galon !...

En eur vogeden ezans ene gwenn Metik kez,
'Vel eur goulmik, a nijaz d'ann én gant ann elez :
Euz a varados Doue eur goabren arc'hantet,
War tour iliz Remengol, neuze zo d'skennet.

War ar goabren ar Werc'hez ha Sent koz Breiz-lzel ;
'Deuz kurunen Gwenole hag he vestrez santel ;
Barzet ann amzer gwechall, drant, war ho sellennou,
Da Zone, e bresonnek, a gane ho gwerziou.

Sebeliet he korf Metik, kichen korf Gwenole,
Ar maro 'n deuz unanet ann eil gant eguile...
Eur c'hloarek karantezuz 'n deus war ho be skrivet
Ar c'homzou truezuz man, gand he zaëlon mesket :

• *Aman repos en peoc'h kloarek koat ar Rannou,*
• *Den freiz hag a galon, den a garie e vro ;*
• *En e gichen eo kousket penn-heres Kerzanton,*
• *Metik an elik Doue, maro gant rann-galon !!!*

O Gwerc'hez vad Remengol, setu o taou buguel
Kousket e tal hoc'h iliz ha dindan ho askel ;
'Vel eur mamm karantezuz war gavel he mabik ;
C'houi dolo evez war be Gwenole ha Metik !!!

Kleier, ograou Remengol, truezuz c'hui zono ;
Barzet ha pelerinet, daëlou c'hui a skuillo,
War be Metik, Gwenole, pa rafet ho peden,
Eur beden a garantez ha carguet a anken !

Bevit e doujañ Doue, tud iaouank Breiz-lzel,
Pedit Gwerc'hez Remengol, evit ma viot zantel ;
Sonjit ive e Metik, sonjit e Gwenole,
Bezit evel d'ho fidel ann eil d'eguile.

Koat ar Rannou (Rann, Rannou, chants, séries), *bois des chants et des séries*. Koat braz e dero, ha zo en kichen ha d'ar zao-heol da iliz Remengol. Anna Drouizet, beleien ar Vreton-

ne, gwechall c'hoas diseiz, a droc'he, bep bloaz, gant eur gontel aour, e koat ar Rannou, eur louzaouen, hanvet *huebar* p'hini a zao war an dero.

Barz, barzet (barde poëte). Bed bloaz ive en em gave e koat ar Rannou hag e *Rumengoulou*, hiriou hanvet Remengol, Barzet ann Arvor. Ar re ma oa tud a skiant pere e gane gwerzious great gant he, war an traou kaer erruet er vro, kana a rent ive meuleudi Teutates, doue faoz, p'hini a oa enoret el-leac'h e man breman iliz Remengol. D'ann hini vije hanvet Barz e roer eur gurunen dero hag eun delen aour, war p'hini ar Barz a gane he soniou.

Gwenklan, Marzin, Tali-zin, a oa barzet e Breiz-Izel kent ma tenaz en-hi ar seiz kristen. — Brema zo c'hoaz e Breiz kals Barzet, pere laka e studi hag ho foan evit kenderc'hel en hon touez ar seiz ha iez hor bro. Er pen kenta euz ar barzet e ma an aoutronez Kermarker, barz Breiz; ann abad Herri, barz ann Aviel; Troude, barz ar Vugaligou; Kemar, person ha barz sant Laurans; Ar Iann, barz Koat-an-Noz; Milin; barz Laouenan-Breiz; Rannou, barz Roc'h-Allas; Joubiou, viket-vraz a escopti Gwenet, barz sant Gwen-Eel; ann abad Klec'h, barz Rungolven; Kaourantin Thomas, barz an Tour-Tan; Prosper Proux, barz Kerne; Ann Hegarad, barz Ploue; I.-P.-M. Ar Scour, barz ann Itron-Varia Remengol; F.-N. An Huel, barz Ker-ar-Born; Olier Souvestre, barz Plouian; ann abad Poullaouek, kure Landevenek, barz sant Gwenole; Karis, person Plougras, barz Mene-Bre; Guernisson, barz Keravel a calz a re all, pere ho deus gret eun niver bras a verzious ha soniou kaer.

- « K. nit anezho, Breiziz rag bez int gwersious
- « Gret gant skian ha galon, ha gant gwel vad komzun;
- « Gret in e brezonnek mad, nan e koz vrezonnek,
- « Evel a re zo kalz-re e brezonnek-gallek.

Barzet ha pelerinet, kanit gwersious santel,
 Kanit gloar ha meuleudi da Vamm tud Breiz-Izel,
 Ho mamm hag o Patronez, Rouannez ar bed oll
 Mamm ann dud paour ankeniet, *Gwerches vad Remengol*.

I.-P.-M. AR SCOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

(Propriété de l'auteur.)

ANN HINI A GARAN

War eun ton nevez.

Ann hini a garan 'zo koant evel ann heol,
Karantezuz evel Gwerc'hez vad Remengol.
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'ann hini e garan roit bepret ho penoz.

Ann hini a garan 'zo dous evel al loar,
En noz pa sklerijen bugale an douar.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo vel eun alc'houeder,
D'am c'halon paour e kan soniou, gwersiou tener.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo 'vel ann durzunel,
Pa ve maro e far en em doll da vervel.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo eun elik Doue,
Eun elik dous a ra joasted va bue.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan 'zo dous he hano,
Evel ar mel eo mad, koant evel ar bleunio.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan em c'halon a chomo,
Tre ma vin e bue, he goude va maro.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan gane-me en disheol,
Ar reposo eun deiz er bered Remengol.
Doue Sent Breiz-Izel, etc.

Ann hini a garan, en pales ann Drindet,
Gane-me da viken a vo karet, karet.
Doue Sent Breiz-Izel, Doue va zadou koz,
D'ann hini a garan, roit bepret ho penoz.

1.-P.-M. AR SCOUR,

Barz Itron-Varia Remengol.

